

## Histor eus a vuaz Santez Barba

Pechini zo mǎd da veza reklamet dioc'h ar gurun,  
a dioch ar maro subit

Me o suppli kompagnnez,  
Da zelaou kana eur vuez,  
Buez Gwerc'hez santez Barba,  
Goude Doue garan muya.

Er bloas daou c'chant ag anter-kant,  
Dindan Maximin an tyrant,  
Demeus a noblans bras meurbet,  
E Nikomedi voa ganet.

He zad a oa idolatret,  
A gorf, a galon, a speret,  
He zad, kalon kris a garo,  
Lake kristeinien d'ar maro.

Mes ar Were'hez Santez Barba,  
A garie Jesus dreist peb tra,  
Kristenez voa a dra serten  
Ha zouten vrás d'ar gristeinien.

He guenet a oa kaer meurbet,  
Gant eur prinç oa bet deziret,  
A goulen a reas anhezi,  
Digant he zad da zemezi.

He zad a gommandas dezhi,  
Accepti zouden ar barti,  
Ag li a respondas neuze,  
Ne raje biken an dra-ze.

Sonjal teuјe da gonsadt,  
He zad c'hourc'hemenas dezhi,  
Antren en un tour er prison,  
Oklassk renji d'he reson.

An Doue adore he zad,  
Eno renversas gant he zroad,

*71 00.779*

— 2 —

A nem rcet d'ar gwir Salver,  
A gorf ag a galon sinser.

Ar c'homzou man a lavaras,  
Jesus so maro eus ar groas  
Ofrr a ran d'he oll Majeste,  
A galon va virginite.

Neuze souden dre virakl bras,  
Sin ar groas ken don a c'hervas,  
Gant he bis en eur men kalet,  
E effasi ne allet ket.

A goude e kommandas prest,  
Ma vige great tri brennest,  
Evit enori an Drindet,  
A garie a galon barset.

He zad an dra-ze pa velas,  
Eus ar Santez a c'houennas,  
Petric sinifi kement-se,  
Zo gret dre oc'h otorite,

Evit henori an Drindet,  
Va zad meus o recommandet,  
An Tad, ar Mab, ar Speret-Glan,  
A zo tri ferson en unan.

Tri brennest zo var ar prison,  
Un Doue so en tri ferson  
Va zad va entent n'ellit ket,  
Et defot beza badezet.

Pell-so va zad oa em speret,  
Dont da laret deoc'h eur sekret,  
Kredi a ran er gwir Salver,  
C'hui glefe iveau en ober.

Souezet omp ous ho kwelet,  
Etrezoc'h, c'hui idolatert,  
Ous ho kwelet e adori,  
Doue gret gant mein a pri.

Me ne ran ket a istim vras,  
 A Jupiter nag a Ballas,  
 Satan en deus o invantet  
 Evit koll ar bobl, eus ar bed.

Eur rum so Egyptianet,  
 Ag a hador ar serpentet,  
 Ispicial ar c'rokodil,  
 A so var dro rivier an Nil.

Darn all a ador un eujen  
 A lod all a bed un azen  
 Ag an dud a Alexandri,  
 A ador ar c'haz ag ar c'hi.

Etrezomp nimp oll kristenien  
 A ador un Doue mui ken,  
 Pehini a so an Aotrou  
 Eus an douar hag an envou.

Va zad, abalamour da Zoue,  
 O pet truez ous hoc'h ene.  
 Lezit ho lezen milliguet,  
 Pe oc'h sur da veza daonet.

He zad neuze pa e c'hlevas.  
 Dre goler vras e respondas,  
 Iffrontet out, en assurans,  
 Komz er feson-ze em presans.

Ia ! ya merc'h te assuramant  
 Sioas peus kollet da skiant,  
 Adori un den so krouguet,  
 Evit krimou ep mar ebet.

Va zad, laket oa d'ar maro  
 Gant ar Judeyien en e vro,  
 Mes, va zad ne ententit ket,  
 Penevert-se omp oll kollet.

Da hennez neus bet va frenet,  
 Va zad, ez on me demezet,

Brassoc'h mest eo assuramant,  
Eguel Maximin an tyrant

Hennez en deus grêt a netra,  
Kement a velomp er bed-maa,  
Hag eur plas roïo da repos,  
D'ar gristeinienn er Barados.

A nep ne gredont henhan,  
Pa zeuyo d'ar varn ar bed-man,  
Vezo barnet ep marr ebet  
D'ar flammou a zo diremet.

He zad e koler antreas,  
He gleze diouc'h-tu a dennas,  
Ag e zreuzi fellas dezhan,  
Mes Doue a viras outhan.

Var e lerc'h e redas neuze.  
A dre bermision Doue  
Eur roe'h wen oa nem digoret,  
Gret plas dezhi da nem guzet.

Goude-ze e voa kemeret  
A gant kerden rust amaret,  
A d'ar presidant Marcian  
He zad el livras he human.

Ar presidant pa er gwelas  
Oue'h ar Santez a c'houlennas,  
Din-me prontamaot livirit,  
Pez seurt Doue a adorit.

Ia ! Credit aotrou presidant,  
Kristenez ouz certenamant,  
Na ne neus nag aonr nag arc'hant,  
A else chaus va santimant.

Dic'halloout eo o toueou,  
Ag e lavaran deoc'h aotrou,  
E kavan gwel vras o fazi,  
Laket an dud d'o adori.

Souezet bras oun me ganeoc'h.  
 Va merc'h truez am meus ouzoc'h.  
 Kuittait ho lezen ato,  
 Pe otramat ez oc'h maro.

Mar kirit chenich a santimant,  
 Me royo dèc'h aour ag arc'haat,  
 Ag eur prinç bras evit pried,  
 O'karo a galon barfet.

Ho toueou so digalon,  
 Jesus eo va zenzor gwirion,  
 Bras vez an den ambitius,  
 Ma ne vez kontant a Jesus.

He zad neuze pa er c'hlevas  
 D'ar president a lavaras,  
 Aotrou president. grit justic  
 Rag homan so loun a valio.

Dre-ze grit justic me o ped,  
 Hervez al lezel he barnet,  
 Pe me skrivo a dra serten,  
 Ez oc'h evit ar gristeinien.

Mar fazit, kredit erfat,  
 E berr amzer kolfoch'ho stad,  
 An Impalaer, dre e arrêt,  
 A ordren ma vezo losket.

Neuze souden voa divisket,  
 Ag ons eur pillier oa staguet,  
 A dispennet gant skrifellou.  
 Ma kweze ar c'hig a bechou.

Un horrub bras e oa gwelet  
 He goad virginal o redek,  
 A ne oa den, bras na bian,  
 Ne weljont oll guitibunan.

Goude d'ar prison oa kasset  
 Er bassefos e oa laket,

O sonjalidre poan ag aken  
E teuje da c'heuil ho lezen.

Neuze souden oa bizitet,  
Gant Jesus-Christ, Salver ar bed,  
Pehini, en eur douch outi.  
A lakas he goad da virvi.

Barba, va merc'h, o ped kourach,  
Rag ar presidant a arraeh  
Ouzoc'h, en defot va e'huiattat  
Da adori Doue ho tad.

Jesus, n'am abandonit ket,  
Mar plich ganeoc'h, va zikouret,  
Ma c'hellin souten konstamant,  
Evit o kloar pep seurt tourmant.

An eol, al loar ag ar stered,  
A vezoo mil gwech distrujet,  
Raog ma vankfenn va gwir Salver,  
D'o karout a galon sinzer.

En deiz varlerc'h oa bet tennet,  
Evit beza interrojet,  
Roet e oa dezhi da choas,  
Renons, pe soufr tourmarchou bras,

Hi fortifiet gant Doue,  
Prest a respontas d'ar Rone,  
Lavaret em eus deoc'h dija,  
Va santimant ep nac'h netra.

Er bed-ma, neus ket un tourmant,  
Am lakfe da chans santimant,  
Va Jesus a so em c'halon  
E varo ag e basssion.

Ag a vezoo da virviken,  
Evit nep glac'har, nep anken,  
Rag-ze, tyrant, hastit afo,  
Deut d'am c'hondaoni d'ar maro.

— 7 —

An tirant-ze gant e arrach  
 A lakas dispen e bisach,  
 Ag ar c'high dioar e c'hostou,  
 Gant kribou houarn a skrivellou.,

Gant goulaouenou alumet.  
 He gouliou neuze rostet,  
 Ag e diou vron a unanou,  
 Distaguet gant razouerou

Laket voa neuze en noaz beo,  
 Goloet hepken gant e bleo  
 Gant eur goabren wen meurbet,  
 Er goloas Salver ar bed.

Var e fenn an toliou marzol,  
 A gweze gant ker bras harol,  
 Ma kreñe memes ar pave  
 Gant a toliou a receve.

Pa veljont oa e nep tourmant,  
 D'ober dei chans a santimant,  
 Var ar chaffot e oa dresset,  
 Evit ma vije dibennet.

Ar boureo gant truez outhi,  
 Ne zibenae ket anezhi,  
 He zad, boureo ar c'hruella,  
 En em offras d'e dibenna.

Neuze ec'h eure eur beden,  
 Da Zoue vit ar Cristeinien,  
 Ma plich da Zalver ar bed,  
 Akordi dezhi eur reket.

Goulen a eure ous Doue  
 Evit piou benak er fedje  
 Ne varvo ket subitamant,  
 Araog receeo ar Sakramant

Un *Æl* neuze apparisas,  
 A d'ar Santez a lavaras,

— 8 —

Barba no pet douetans ebet,  
Akordet eo deoc'h ho reket.

Eur gurunen a c'hoar a zougan  
Breman souden do kuruna.  
Rag prest oc'h da vont da velet  
Doue, ar Sent, a Sentez.

Un taol kleze digant he zad,  
A zispartias evit mad,  
He c'horf buan deumeus he fenn,  
Ag e lamas a bep anken.

Un taol kurun deumeus an Env,  
A fweltras he zad goude-ze,  
Kement all evit paemant,  
A c'hoarvezas gant an tyrant.

E pep korn euz a Vreiz-Izel,  
So un ilis pe eur chapel,  
Cediet da Santez Barba,  
Goude Doue garan muya.

En drede lun a viz gwere,  
E vez bras ar solanite,  
E Santez Barba, en Rosko.  
Eno e vez tud a bep bro.

Santez Barba, deumeus an tan,  
Hor preservit bras a bian,  
Ous gurun a maro subit,  
Hor preservit dre ho merit.

A pa finiso hor baez,  
Bezit hor gwir Avokadez  
Dirag Jesus Salver ar bed,  
Ma n'em welfomp er Joausted.

LE BRUN.

*Propriété réservée.*